

DISPUT NEVEZ

588Ad

c

SAVET ETRE DAOU ZEN IAOUANK

Divoar benn eun Dimezi

Var eur ton anavezet

Me a oa manet minor boe an oad a bemp bla,
Ha breinan me zo major, en oad da douc ma zra;
Mar choman pel den iaouank a renkin bean tost,
Pe achapo ma erc'hant pa na deus ket al lost.

Gwel eo din buan difen keit a meus eun tam treo
Ha klask danfe eur fortun vo engal din a gleo
Me hanve eur plac'h iaouank a gavan deus ma zouch;
Beza deuz en tam arc'hant ha oar a renk da douc'h.

Ma klaskan eur vas voelen, me vo brudet dre oll;
Pean mari dam imban, kement-se galan droll;
Mont ma unan e bete, ma na blijant quet dei.
D'am refus deus liberte deus ket an droat da skei.

Ar Potr oc'h erruont e ti ar Plac'h iaouank.

Salud, feumeulen iaouank, dre gomzo Cupidon.
Me meus poan ha nec'haman ken eo trist ma c'halon.
Me a ze den d'ho koulou, ma akseptet ma c'hoz
Nimp a lakao peden breman gant hon zud koz.

Ar D'ho

Me na gredan ket den iaouank, o pe eur galon trist.
C'hui peuz format eun diskour vit koet eur barnac'h jist;
Toulet zo eur variken vad, me gred ho poa klevet,
Oar digare ober marc'had e torfet o sec'het.

Ar Potr

Me n'o ket 'vit kaet boisson hon dent betek aman,
Respontet din ho rezon oar pen a c'houlou;
Beza meus okasion da feurmi eur c'houldri.
Ne vank di met eur pichon 'vit koumans menagi.

Ar Plac'h

Oblijet hon da gredin rezonniou an dud coz:
E krog o c'hoant dimezi prim vel eur bar drouk-kof;
C'houi zo deut surpris-a-mis d'am goulen den iaouank;
Evel calé ofrans o vousis da chapel Zant-Visant.

Ar Potr

Aboe ma komansas Venus da bika ma c'halon,
Pemb pla zo tremenet aboe est a mele'hon,
Ho c'havizan ar merc'had n'am beus kavet unan
A defe ma zorc'hennet evel doe'h, Mari-Jan.

Ar Plac'h

Klevet eta, Imari, na golet ket oc'h amzer,
Me c'ha d'ho tizorhenni pe o dies ober.
Me am boa ma c'hurunen da vonet n'ar bed-all,
Gredan ket e timefen na dec'h na da re all.

Dimezi' n'amzer brezant zo mon en esklavac'h,
Gwir eo kalz antre contant en breuries karnac'h ;
Pa ven dud oar marc'h fortun vent kamarado bras
Hac eur veach groet ar c'hontrat vent oll vel ki a kas.

Ar Potr

Daou den a ve kontradet gle beza vel unan.
N'eum respecti, n'eum garout vel Tisbe a Piram ;
Mar gom choaset gant Doue vel Tobie ha Sara,
A veofomp eun union hac accord oar bep tra.

Ar Plac'h

Vit damisa eun ounner be o froter dezi o zall.
Koms broa : chom'ta, koantennik, tap da droad den nall ;
Eur voc'h prennet ann ugent, et ann ask oar e fen,
Oar eun e renko kerzet pe gavet fest darguevern.

Ar Potr

Ann tol a zo difennet gand Doue ha gant ar bed,
N'oullan ket kavet eun hano vel Albert-Pil-he-Vroeg.
Pehini nevoa goulennet, rog siua e gontrat,
Ma bijet mechant e vreg, kaet droet d'he filat.

Ar Plac'h

Kals ar guemer ann droet-se hep goul permission ;
Non quet da betra tamal ken bras disunion
Ne glever met an 'nsul, a gourdrous hag an tol :
Skouer fal'vit ar vugale ha skandalus d'an oll.

Ar Potr

Ar bet zo corrompet breman gant ar visso.
Hag ha dol had jalousi en kals ar jardino.
An ourgouil zo ken krenv ra dimp n'eun meprisan,
Oll so hoant da gommandi ha den na c'houl plegnan.

Ar Plac'h

Evidon-me, ma dimezan, renki beza mestres,
Mar ho peus c'hoant kommandi nomp bet mad assambles.
Hag ouspen he tivisfen, rog beza kontradet,
E ve red din kavet eur voetur n'an ket oar bidet.

Ar Potr

Ia, ar merc'het zo breman, gar bezan guisquet mad.
Ha kotillon, ha brago, oll, o deuz hoant da gad :
Ann toul ar boutonno, ha commandi partout,
Ha pa de debret ar mei, ia i a lipo ar pout.

Ar plac'h

Eñchen, beza zo groague renk guiska ar brago,
Ma fiout re n'ho sotred dirijean 'r menajo,
Deufe abred ar ziele da goac'h toul ann alhue.
Ha mont da chomp da Langueux, da frita paourante.

Ar Potr

Dre ze renkiu kaet eur plac'h deus a a goste a mor,
A reze oar oll a sekret na destumer enn gor,
Prena guiskamant frezuz, condui eun dol rond,
Ha tamal c'hoas da Isidor mar ga ar stal da foud.

Ar plac'h

Ha c'hui, entre-zoc'h potred, oar cleuza boutaillo,
Kargan mad; ha chareal d'an ostellario:
Goude dispignoc'h arc'hant rentet dal ha bouzar,
Bete oar ann henn bras a diskaret ho kar.

Ar Potr

N'en deus ket a intrudu, vel groague Breiz-Izel.
A reze o deus oll peb a filtr ha peb a sac'h flanel;
Goud a ouzont grilla kafe, implian konven lez,
Fonta suk en dour tom hag ober ze hep frez.

Ar plac'h

C'hui a zo eur mest koseer, c'hui rai c'hoas eun oac'h.
Evurus vo'r femeulen a c'halon oc'h attrap;
Vanket ket dezi a neudri pa vefet oar dro ar guer,
Ha diboultret he dillad d'ar chouls ha d'ann amzer.

Ar Potr

Mar me eur plac'h a fesson, vel meus esperans,
Ma ve quiet faibl e bis da soufr he c'hallians,
Beza d'ho he liberte, na vo quiet esclaves;
Mes vit eur veal gafe na bermetin james.

Ar plac'h

Neuze vo red dec'h ive renons d'ar guin-ardant.
Ma c'helfet miret o pen hac ho c'hintentamant:
Ma, be red dec'h kommandi hac ebarz hag er mez,
Nim groet vo dre ho losten a vo zila 'rlez.

Ar Potr

Partout roi ma avis ha mont d'ar marc'hajo,
Balamour da douch an arc'hant ha d'efan banac'ho
Ha pan retorni d'ar guer, mar be vroec'h fasset fal,
A kommansi da gana vit ober dei dansal.

Ar plac'h

Mar gue vit ober boufon ho peuz ezomp eur plac'h.
Eo guel d'ac'h klask eur vates, a pa vo squiz ganac'h
A vo libr da bartian ha c'houi da glasq eun ail:
Ha ma partife ho kroeg e pe eun tan scandal.

Ar Potr

O eur vroeg eo a mezo ben gouel Mikel quantan
Dec'h a ran o breferans, c'hui a mo mar gallan :
Na deut quet da gredin, evit-hon da larsal,
A me c'hoant d'ho poufenni, rak n'hon quet eun den fâl.

Ar plac'h

Laret meus dec'h ma ide, na neam dislarant quet ;
Gredan ket e timefen dec'h na da zen a het.
Konversin ran gand an dud da roulan iaouankis,
Divezat vin da c'houezin pa mo poazet ma bis.

Ar Potr

Deus klevet ho proposiou, noc'h ket vit en demezin.

Ar plac'h

Nan, a drazur, den iaouank, birviken ze na rin.

Ar Potr

Me sonje feurmi eur plas oar eun anou hon daou.

Ar plac'h

Feurmet-han dec'h oc'h unan a peb hini n'e graou.

Ar Potr

Neuze c'han da sortial, ken a vo plac'h iaouank
Bell sekret oar guemen-ma hac em renfet kontant.
Pa na non ket d'ho c'hide, red eo klask eun all.

Ar plac'h

Bremon oc'h libr d'ha vale keit a moc'h dishsal.

Ar potr a sorti ous n'em lavaret

Non ket oar besort koste ruilla ma boul,
Me grede d'in oa merc'het en c'hoant dime a foul.
Trompet eo bet ma gueno o santaut a sort blas
Lec'h ma sonjen ober mil, nebon meus gruet kas.

Pevar mis oant bet en Paris, sernet gand en Prussianed,
Na biskoas ar sort trubuil ma bet or ma spêret ;
Bet aboa kals a viser hag eur bansion dreut,
Goas eo diu klevet breman man ma fri voar ar gleut.

Oar ben eiz devez goude, kanaouerien ma bro,
A gri oll, e vouez huel ; potr egrouin, voar n'hon.
Obliget hon d'andurin' pez hon tapet en plan
Mo zentlen ouz ma humor, me rafe dei biskan.

Mes pa deus brudet a dost, me a vrudo o bel ;
Me a da gas eur chanson da vale Breiz Izel ;
Ha tud iaouank ann Arvor, kouls vel koste ar c'hoad.
A guemero plijadur da c'hoarsin oa ma stad.

(Propriété)

PIERRE RAISON